

# CHANSON NEYEZ,

*Composet var sujet eur c'himiati etre daou zen  
yaouang a escopti Treguer.*

Var un ton divertissant.

*Ar Goas.*

**B**ONJOUR deoc'h, va Mestres, deut ouz c'hoas  
d'ho quelet;

Dioc'h ma leverot dîn, em rentot glac'haret;  
C'houi oar a bell amzer peguement ho caran;  
Merget emeus-en deoc'h n'en d'e get a vrem'an.

Demeus eur c'hostez all oc'h eus sur va zromplet,  
Ma na deut oc'h-unan eun nebeut d'am c'haret;  
Seblantout a rî din ne oac'h qet drouc constant  
M'en em gavemp un tu assambles e parlant.

Bet zo gueneomp hon daou alies preposiou,  
Testes wat oc'h anê, dalc'hit mat d'ho comzou;  
Me vo fidel d'am guer, dalc'bit mat d'oc'h hini,  
An amzer a avanç, poent e deomp d'ewezi.

Ho pizach, ho portret, ho teod, ho taoulagad,  
Ho furnes, ho toqçder, ho comzou dereat,  
O deus grêt eur speret qer bras impression,  
• Max deut d'am dilezel, e ranno ya c'halon.

44-4417-198



N'ouffet petra d'ober, ret eo clèvet bremâ  
 An arret definitif, va setanç diveza ;  
 Guell eo mervel buan eguet bout languissant,  
 Bepret en esperanç, bepret en nec'hamant.

Roit din, va Mestres, prontamant va arret,  
 Ha sonjis qent e rei emeus calz ho caret ;  
 Consultit hō calon, sonjis n'en deus hini  
 Ho car mui eguedon, ha deut d'am c'honsoli.

### *Ar Plach.*

Donet d'ho consoli a c'houlet, va mignon,  
 Ezom a meus ive à gonsolation :  
 Ganêc'h e c'houlennan ar c'hraç a c'houlennet,  
 Ezom hon eus hon daou da veza consolet.

Ho setanç a c'houlennit, plijet gant va Jésus  
 E tēpante ouzin e rei deoc'h graciis !  
 Certen en o pije en ho tiscretion,  
 Agreeabl decomp hon daou en dezir hor c'halon.

Ma vijen me mestres demens va bolonte,  
 Me voa deoc'h ha c'hui din hep nep dificulte :  
 M'emeus ho caret mat hac ho car a vremâ,  
 Ranna ra va c'halon oc'h en em dispartia.

Mes qent dispartia, me ho ped, selaouet,  
 Ha grit reflexion var va guer ur momet :  
 Doue a c'hourc'hemen senti oc'h tad ha mam,  
 Hac oboissa dé evit beza divlam.

Int a zalc'h en henver plac an Otrou-Doue,

3

**Obeissomp**, p'on eus digante ar vue :  
**Calz a boan o deus bet o tont d'on elevi,**  
**Ne qet just hep o grāç-vad donet da zemezi.**

**O monéz zo evidomp certen mouez un Doue,**  
**Biжен nétra ne rān hep caouet o c'bonje :**  
**Grēt emeus va fossubi vit o renta contant,**  
**Grēt oc'h eus oc'h ini, ha ne dint qet assant.**

**Me gred bremā certen ne domp qet deslinet**  
**Da yeza priejou assambles unisset;**  
**Doue ra deomp entent e vouez dre o guenou,**  
**Biжен ne dransgressan sur e c'hourc'hemennou.**

**Ma raen hep o c'hraç-vad ur marchat qer padus,**  
**Em be aon goude-se na ven me maleurus ;**  
**Va c'houstianç goude a rebeche diu-me**  
**Em be ho qemeret hep conje va ligne.**

**Comzet meus ha grēt comz en hor faveur oute,**  
**Ha biscoas n'eus gallet o zrei var an tu-ze ;**  
**Credit en assuranç oun-me qer bras sachet**  
**Ha ma ouffac'h beza, pa ne dint distroet.**

**Qement ameus grēt tout a zo bet inutij,**  
**Demezi hep o c'bonje n'en deo qet difficil ;**  
**Mes hennes zo eun dra ha na rin birviq'en,**  
**Var guémentse james ne dorrin o lezen.**

### *Ar Goas.*

**Hebien, va mestres, houimā zo calonat,**  
**A goust un abondanç daelou d'am daoulagat !**

Va c'halon gant glac'hар a zo cazi rannet;  
Houmâ zo calonat, goude beza caret!

*Ar Plac'h.*

Allas ! va servicher, penaos ho consoli ?  
Qer bras eo va regret ha ma zeo hoc'h hini,  
Qement en ho carien ha m'aljac'h va c'haret ;  
Ar regret a zo just entrezomp partajet.

*Ar Goas.*

Coulz eo ta, va mestres, prontamant qimjadi,  
Pa n'eus qet a voyen evit hor c'honsoli ;  
Credet am boa bepret an amzer a deuje  
Da zistrei ho querent da veza em c'hoste.

Gounezet em boa-y ha distroet a gren ,  
Mes prestiq goude-se e chenchont a lezen ;  
Ne fazin qet enno, aqualch'oc'h eus clévet  
Divar var fenn bemdez pa deuen d'ho quelet .

Poent e deoc'h caout peoc'h, ha din-me demezi ,  
Aben eiz dez amâ me vo sur anezzi :  
Quez ameus o quitat; c'houi vise, ma carjac'h ,  
Nemet var ho refus birviqen n'am bo plac'h.

Adieu deoc'h a larân , adieu va esperanc ;  
Bremâ me ranqo clasq'en eur plac all va chang ,  
Fachet e zoun terrubl o tonet d'o quitat ;  
N'en deus netra d'ober vie gounit hio crac-vat.

Roit din qent quitat ur poq da guimiada ;  
Allas ! me gred certen e vo an diveza :

Calet e deomp hon daou ur seurt cris disparti,  
Manqout-ra va c'halon, an nerz em izili.

- Ret eo e nep-fortun caout calz eus a gourach;  
Arabat eo sucombi james evel eul lach :  
Finissomp gant enor vel m'bon eus comancet,  
Pa na bermet Doue e vemp-ni unisset.

Adieu-deoc'h a laràn qent evit hօ quitat,  
Me c'houlen evidoc'h tri pe bevar mennat :  
Da guenta caout un all en devo talanchou  
Mui eguet n'ameus-me , ha mui eus a vadou.

Buez hir, joa eurustet, ha calz demeus a chanç,  
Yec'het, plijaduxez, famill en abondanç,  
Graç Doue er bed-mâ da zont d'o qenderc'hel,  
Er bed-all d'ar goude ar joayou éternel.

Ezàn bremâ d'ar guêr, adieu a laràn deoch,  
Birviqen n'ho quelin n'am bezo joa ouzoc'h;  
Mar permet va c'hlac'h ar arietii va daelou,  
Aben eiz dez amàn eur plac'h all am bezo.

Pa ne allàn caouet an hini ameus c'hoant,  
Sur un all awi bezo hac a vezò contant;  
Un nor a ser quzin hac un all a zigor :  
Ret eo goude refus repari an henor.

### *Ar Plach.*

Allas ! va servicher, m'ho ped , na gredit qet  
E ven-me qiriec mar d'oc'h bet refuzet ;  
M'am bize-me gallet, hep terri al lezen ,  
Donet d'ech eureurji, certen en er grajen.

Qement oun glac'haret ma ouffac'h-u beza,  
 Emedi va chalon var ar poent da ranna;  
 Bras eo ar sacrific a ràn-me da Zoue,  
 Me gred e recevin ar recompańç goude.

Me garje n'am bize birviqen ho quelet,  
 Pa ne allân bremâ ho possedi bepret;  
 Dre va obeissanç qer aoualc'h e pacàñ  
 Va education , va antren er bed-mâñ.

N'ouffet petra raet , al lezen a gomand ,  
 Ne avancin james hep o c'honsantamant.  
 Brizomp bremâ souden oll gérz hor chadennou ,  
 Ha renoncemp a genn d'hou oll promessaou.

Enem separomp pront , pa n'ellomp-gouseoude ,  
 Na chomomp qet an eil d'affija eguile ,  
 Elec'h-all ny gavo eur re d'hor c'honsoli ,  
 Rac amàn hor glac'hat ne ra nemet cresqi.

Qent ma tispartiimp , m'ho ped , va servicher ,  
 Un daou pe dri sonhet ameus c'hoant da ober ;  
 Ur fortun gaer ha prompt , furnez , madou , coantis ,

Vertuz , speret , menach , famill ha yaouanqis .

¶ Grac Doue er bed-mâ da zont d'o qenderc'hel ,  
 Hac er bed-all goude ar joayou éterniel :  
 Cetu aze ar poqou bo poa goulennet ,  
 Biscoas hini na rois gant iuioc'h a regret .

Ma carre an dud yaouanqis pere a rën er bed ,  
 Gundui ho yaouanqis gant enor ha respect ,

E vevfent oll erfat e durant o bue,  
O caout an esperanç demeus a c'hoar Doues.

FIN.

---

## CHANSON AR BIG.

*Var un ton ancien.*

D EMEZELET an otrou Tanguy  
O devoa diou Big en o zi;  
Disqet o devoa d'ê parlant,  
Evit o divertissamant :  
Da vourg Plouyan e c'hent da bournen,  
Da velet o amezeyen.

Ar big qenta eus aneze

A ye eus an eil ti d'eguile,  
Elec'h ma sante c'hoes ar c'hrampoez;  
Hac e c'houenne un tamic  
Da zoulaji e c'halonic.

Allas ! dre valeur e zeo bet êt  
Da di Jannet an Avelet,  
Evit goulen un tam crampoez,  
Hac ive ur banac'hic læz;  
Mes an dirantes-se cruel,  
El lazas gant un tol spanel.

Monstr ! da galon na fraille qet

8

Gant an druez eus e c'hlévet  
O crial diyat boes e fenn :  
Va bnez din, Aveleden ;  
M'ar doud fachet, ne deuin mui  
Da glasq crampoez na yot da ti.

An dinantes ne qet bet contentet  
O veza bet ar big lazet ;  
Qemennet e deus da vap Grall  
E rencje ober qement all ,  
E rencje ober evelti  
Da big all an otrou Tanguy.

Xan an Ena, ni a sonje  
E voas-te fur bete neuze ;  
Pa poa-de grêt eur belevat,  
E poa qeillet ar scudel goat,  
A poa-de qeillet en ti-forn :  
Chanç vad hon eus divar da zom.

FIN.



---

E MONTROULEZ, e ti LÉDAN, e'ru ar Vur.